


## Petra eo disk kalet ur c'hompoder ?

Ur beriferell, pe adstramm, eus ar reoù bouezusañ en ur c'hompoder eo an disk kalet. Posupl eo gwelet an disk kalet evel ur vagazenn a c'heller klenkañ madoù enni evit kerc'hat anezhe diouzh an ezhommoù. An data eo ar madoù klenket en un disk kalet. Lavaret a reer ec'h eo an disk kalet un unvez klenkañ data.

Graet eo un disk kalet :

- gant pladennoù magnetek, a zo o roll mirout an data enskrivet,
- gant pennoù lenn-ha-skrivañ,
- gant ur wikefre plasañ ar pennoù,
- ha gant ur sistem elektronikel a zo e roll treiñ an data a zeu eus ar c'hompoder, dre heuliañ protokoloù gourc'hemenn ha trañsport data evel ATA ha SCSI.



Bihanoc'h eget 1 milimetr eo tevder pladennoù un disk kalet. Graet int gant ur c'hendeuzad metal skañv ha goloet eo o gorreoù gant ur gwiskad moan a bartikulennoù magnetizet a c'hell bezañ cheñchet o reteradur evit kodiñ an talvoudoù binarel 0 ha 1.

Kontrollet eo brec'h plasañ ar pennoù lenn-ha-skrivañ gant ur motor pazenn-ha-pazenn. Dre un diblasamant ankllel e tremen ar vrec'h eus un eil roudenn enskrivañ d'eben. Gant un eil votor e-kreiz ar stramm e vez lakaet ar pladennoù da droial gant tizhoù etre 5400 tr.mun-1 evit ar reoù ar muiañ ordinal ha 15000 tr.mun-1 evit ar reoù varrekañ.

Dre un efed koldre-aer produet gant tizh troial uhel ar pladennoù e vez dalc'het distok ar pennoù diouzh gorre a-us ha gorre dindan ar pladennoù.

Rezañ a reont ar gorreoù a dostoc'h eget 1 mikron. Evel-se e c'hellont lenn pe skrivañ, dre intent pe dre cheñch reteradur ar partikulennoù.

Ur penn lenn-ha-skrivañ a zo da bep fas ur bladenn. Kensolud war ar memes brec'h eo an holl bennoù ha, dre se, e tiraезont d'ar memes koulz ar memes roudennoù war ar pladennoù. Furmiñ ur granenn a ra ar memes roudennoù-se, dezhe ar memes niverenn urzh. Hag, abalamour da se ez eus kement a granennoù hag a roudennoù war bep fas pep pladenn.

Neuze e c'hell kement dataenn enskrivet war un disk kalet bezañ diraezet dre he chomlec'h fizikel termenet evel-mañ : pladenn, fas, roudenn, sektor.

## Geriaoueg

periferell, adstramm  
unvez klenkañ data  
pladenn vagnetek  
penn lenn-ha-skrivañ  
gwiketre plasañ ar pennoù  
motor pazenn-ha-pazenn  
efed koldre-aer

périphérique  
unité de stockage de données  
plateau magnétique  
tête de lecture / écriture  
mécanisme de positionnement des têtes  
moteur pas à pas  
effet de coussin d'air